

**Gwennou** (Tal Houarn) Lezardre 1851 – Vitry-sur-Seine 1915).  
Salud da Gerzilin. Embannet e 1912.  
Modernnaet eo bet an doare-skriva. Faziou ha viou-koukoug a zo er skrid orin.

### Salud da Gerzilin

Hic erat vir !  
Hemañ a oa eun den !

Pa Gouezas an delenn diouz da zaouarn skuizet,  
Eun hirvoud en or Breiz dre-oll a oe klevet...  
Ar Varzed a lare : « War da lerh , Kerzilin,  
Piou a yar dim klevet c’hoaz telenn aour Marzin ? »

« Da vouez a oa e vouez, bepred sklêr, dudiuz,  
Hag, evid da zelaou, an oll varzed, doujuz,  
A chome hep kana, touellet gand da werziou...  
Den, koulz ha te, ne ree tridal o halonou !..

Doue, Breiz ha Bro-Hall !!! Na disparra Dreinded !...  
E goueled da galon deze az-poa savet  
Eun aoter digeflusk, warni noz-deiz  
E skuilles, hep paouez, teñzor da garantez.

Hag e-pad triweh vloaz, da levr “An Erminig“  
A zeskas dim karoud gwelloh-gwell or Breizig.  
Or zent koz, or yez flour, feiz kreñv on hendadou  
Ha gand kalon ha joa, kerzed war o roudou...

Pell amzer or bro-Vreiz a chomas morgousket,  
Gand an Divroidi<sup>1</sup>, tamm-ha-tamm touellet,  
Hag heh enebourien fallagr a vouse’hoarze... !  
Setu an huanad diweza, emeze !

Warhoaz, Breiz a varvo ha war he bez biken  
‘Med linad ne gresko... Uhelvarr ha dervenn,  
Kollet int eviti, ha kollet evid mad... !  
Setu eur Bobl nevez o tond, muioh d’on grad... !

E-pad meur a gantved, an dud-e-karg uhel  
D’or Bro, d’or yez karet, a reas dalhmad brezel.  
Poan gollet ! Or herreg ha dero braz or hoajou,  
Gand stard ma’z int, startoh eo c’hoaz or halonou.

O klevet Kerzilin<sup>2</sup>, Breiziz a zihunas...  
Mervel, emeze ? Nann ! Beva a fell dim c’hoaz,  
Beva da virviken !... Henez eo youl Doue...  
War da lerh e redom o krial : “D’am buhe”“ !

---

<sup>1</sup> an Divroidi : ar ha n’int ket Bretoned, a oa deut da jom e Breiz. Gouennelour eo Gwennou.

<sup>2</sup> Kerzilin : Tiercelin.

Deveziou a fiziañs, a hloar, a levenez,  
War-lerh deziou pounner ar boan hag an enkreiz !  
Setu dihunet Breiz ha war-zao adarre,  
Ha dit, Barz, evid kalz e tleom kement-se !

A ! ne varvi ket oll ! Du-hont, en da houdor,  
En da di Kerarzur, savet tostig d'ar mor,  
Da ziskibien, doujuz, laouen o halonou  
A zered da gas dit o gwella mennoziou.

Nann ! ne varvi ket oll ! War da lerh e pado  
Al labour kaer-meurbed en enor or Mamm-Vro  
Ah-eus kaset da benn !... Ar Varzed anaoudeg  
A lar dit : “Trugarez, bennnoz, mestr kaloneg !“

Kerzed war da roudou a zo dim eun enor,  
Ha disklêria d'an oll, en Argoad, en Arvor,  
E chom ouz da galon staget or halonou  
Hag en da vuhez hir, e klaskom or skweriou...

Skuillet Doue warnout e wella Bennoziou  
Ha roet dit ar hras, e diwez da zeiziou,  
Da weled o henel eun “Erminig“ neve'  
Heñvel ouz da hini... A ! na kaerra huñvre !

Salo ma teuy da wir !... Me a garje gweled  
War dal al levrig-se da ano kizellet,  
Da zeski d'or Breiz e oes den a galon,  
Eur hristen didrehet hag eur Breizad gwirion !

Vitry, e-tal Pariz, d'an 30 a viz Mae 1912.